

Ar gorventenn (barzhoneg)

(Yann Moulin)

An avel foll storlok an nor
Ar mor bras zo fuloret
Koumoul du a-us d'ar menez
A ziroll d'an daouc'haloup
Ar glav hag ar grizilh kemmesket
' pokañ start ouzh ar prenestr

An avel sot a ya war gresk
Skrijal a ra dindan an nor
Ar mor en deus lonket an aod
Barr-heol ebet, tamm loar kennebeut

Ar mor 'zo du ha ruz
Ar c'hi dindan an daol ' krenañ
Metig dindan an armel
Pladet

Sellit ouzh daoulagad ar gazeg
Hag ouzh he muzelloù eonek
Selaou ne'i hag he faz gavotenn
Spontus !

Ruilhat a ra sailhoù, plouz, keuneud
A bep seurt war al leurger
Kreisteiz a ziskenn ouzh an tour
Ha koulskoude, noz war an douar
Siwazh !

Ar mor 'zislouk 'bep seurt loustoni
An douar 'zislouk ludu brein
Hag ur bern traoù euzhus

O sellit 'ta ! An doenn he deus kuitaet an ti
War ar c'hraou, memes tra !
Jesus, mar plij, deuit en-dro ganeomp-ni
Mar plij ganeoc'h Jesus, Jesus !

Petra c'hoarvez gant an heol ?
Hag ar c'houmoul hag an avel ?
Peseurt reuz war an douar !

Marteze, DOUE an TAD a zo 'stourmañ
Holl vignoned, dirak mestr ar bed
Dav deomp stouiñ

*Bet savet gant Yann Moulin warlerc'h ar gorventenn vras da sadorn 24 a viz here 1987. Penn-
ar-Roz, 30 a viz du 1987. Bet dianket goude-se. Hag adkavet e miz du 2017.*

L'ouragan

Le vent fou fait s'ébranler la porte
L'océan est en fureur
Des nuages noirs au-dessus de la montagne
Déchaînent au triple galop
Un mélange de pluie et de grêle
Cognant durement sur la fenêtre

Le vent enragé monte en puissance
Il hurle derrière la porte
La mer a avalé la côte
Aucun rayon de soleil. Pas non plus de lune

La mer est noire et rouge
Le chien sous la table
Tremblant
Metig sous l'armoire
Aplati

Regardez le regard de la jument
Et ses lèvres écumantes
Ecoutez-la et son pas de gavotte
Effrayant !

Les sauts, la paille, le bois, toutes sortes de choses
Roulent sur le placis
Midi descend du clocher
Et cependant, c'est la nuit sur terre
Hélas !

La mer vomit toutes sortes de saletés
La terre vomit de la cendre pourrie
Et un tas de choses abominables

Oh ! Regardez donc ! Le toit a quitté la maison
Sur la crèche, même chose
Jésus, s'il te plait, reviens vers nous
S'il te plait Jésus, Jésus

Qu'arrive-t-il au soleil ?
Et aux nuages et au vent ?
Quel ravage sur la terre !

Peut-être DIEU le PERE est-il en lutte
Mes amis tous devant le maître du monde
Il nous faut se prosterner

*Ecrit par Yann Moulin après le grand ouragan du samedi 24 octobre 1987. Penn-ar-Roz, 30 octobre 1987.
Ensuite égaré. Et retrouvé au mois de novembre 2017.*